




2484h  
/g

## CANTIC SPIRITUEL

EN ENOR D'AN ITRON SANTES ANNA AR PALUD

*Eur plaç santel a zo en escopty Querne  
e parres Plounévez-Porsay, a dost d'armor*



VAR TON : *Santez-Mari, Mam Doue.*

Me ho ped, Tad Eternel, crouer ar firmamant,  
Roit d'am speret sclerijen, Dioue olli-buissant,  
Da disoloï eun tensor a zo e Breiz-Izel,  
Etouez ar Vretonet leun a graçou santel.

différent d'Olivier

**Guerc'hez glorijs Vari,** me ho ped, ma sicouret,  
**C'hui Itron Santes Anna zo enni enoret,**  
**Evit disclerian d'an oll ho craçou excellant,**  
**Hac ar miraclou a ret, Rozen ar firmamant,**

**En escopti a Guerne e bërdic ar mors glas,**  
**E parres Plounévez-Porsay euz eur zoarsen a chraç,**  
**Eur plaç leun a viraclou, mar deuz var an douar,**  
**Batisset en eur blenen dirac an eol pa bar.**

**Cals euz a plaçou santel a veler batisset**  
**D'an Itron Santes-Anna, e peb lec'h enoret.**  
**Balamour ma ra bemde nombr bras a viraclou,**  
**Hac er mor hac en douar e cleo hou pedennou.**

**Mæs hep choqui, nep chapel zo dezi batisset,**  
**E deuz eur plaç santel er Palud biniget,**  
**E leac'h ma zeo enoret guir vam-goz hon Salver,**  
**Gant an oll belerinet demeuz a bep quartier.**

**Ar plaç-man zo frequantet gant guir devotion,**  
**Gant ar gristenien fidel demeus a peb canton,**  
**Abalamour ma e deus roet cals a soulajamant,**  
**Ha ma obtén ar yec'het da gals tud languissant.**

**Pobl an escopti Querne, c'hui a zo eurus**  
**Da gaout en ho touez guir vam-goz da Jesus :**  
**Deut oll da c'houlen outi ar c'hraçou necesser,**  
**A galon vad d'e fedin d'ho tivoall dioc'h danjer.**

**O Itron Santes Anua ! brem! ma sicouret,**  
**Pedit ho merc'h ar Verc'hez da rei d'in ar speret**  
**Ma c'hallin dre ho sicour comz eus ho miraclo,**  
**Hac eus ann oll joausdet a laquet en hon bro.**

**C'hui oc'h eus plantet ar ros elec'h ma oa ar spern,**  
**Ha gret bent ar baradoz eus ann hent ann ifern ;**  
**C'hui oc'h eus bet distroet pec'herien caledet,**  
**Hac o laquet da vezan tud santel ha parfet.**

Me ho suppli, tud devot, helaouet a vrema  
Comis demeus ar miraculo a ra Santes Anna,  
Ma teofot oil a galon d'an'alud d'e guelet,  
Ha ne goll quer ho poan de graç Salver ar bed.

Eus ar parres Plougastel va eur baelec yaouane  
Privet eus ar guelet, en deoa nec'hamant,  
E spaç eus a dri mis, sioua ! en eur goall stat,  
Hep lavaret oferen gant androuc daoulagad.

Alliet oue gant e dud ractald'en em vouestla  
E chap'l ar Palud d'hor man Santes Anna ;  
En devez m'harruas en deus oferennet :  
Meulet ra vezò Jesus hac he Vam biniguet !

Eus a guichen Pont-Abat eur certen plac'h yaouanq  
Bet tri bloaz gant an derchen, e devca cals a nec'hamant  
Eus navet e deus gret e chapel ar datud.  
Bet e deus ar yec'het a zisparitas cals a dud.

Eus ar guer Quemper eur potric daouzez vloa  
E spaç a dri devez bet gant an diwoada,  
E vam a zisparitas offrang a galon vad  
Da Santes Anna ar Palud, ractal e cess ar goad.

Ur batimanf carguet, var e guenta beach,  
Gant an tou rmant attaquet, o tremen Bec-ar-Ras,  
Peder heur varnuguent bet entre an daou mour,  
Perissa a sonjent hep galloud en em sicour.

Ar c'habiten, den devot, hac e vartolodet  
Da Santes Anna ar Palud o deus en em voestlet,  
Dre ar graç a Zoue hac e vam goz Anna,  
Rentet e voan en Brest, disanger ha gant joa.

Evit e drugarecat, o vœu o deveus gret  
Dierc'hen er Palud ha en corf o rochet,  
Gant pep a piled-coar, evit rei testeni,  
Eus ho miracl quer caër, Mam ar Verc'hes Mari.

# CANTIC

A VEULEUDI D'AN ITRON SANTES ANNA

Enoret e Parres Plounévez-Porsay

*E chapel ar Palud, a dost d'ar mor*

## VOAR EUN TON NEVEZ

Me hoc'h ador, ma Doue, eus a greis ma c'halon,  
Hac a rent d'ho Majeste mil benediction,  
Da veza ho enoret ha carguet a joa,  
Ar graçou accordet d'hon Mam Santez Anna.

O sourcen an oll graçou ha leun a santelez !  
Recevet hon c'halonou, Mam leun a yadelez,  
Petric bennae ma oump indign eus ho protection,  
Suppliet e Mab divin da accordin deomp pardon.

Itron gant Doue caret, rosen mysterius,  
A c'hanoc'h eo sortiet Mari, mam da Jezus,  
An hini a oa choaset a bep eternite  
Da garga a joausdet an douar hac an Env.

C'hui eo ar guir patrones eus ann dud eureuget,  
Hac ar guir advocades d'ann oll intanvezet,  
Tensor ann oll vertuziou, exempl ar guerc'hezet,  
Hac eur vam leun a graçou da guement den ho ped.

Demens a greis hon ene ha gant eur guir fisianç  
Ec'h offramp d'ho carantez oll gouvernamant Franç ;  
Pidit Doue da accordin d'ar Fransijen guir gristen  
Ar c'hraç da gaout ar victoar voar e adversourien

Tud cam, tud dall a bouzer e deveus soulajet,  
O reï ar c'blevout, ar guelet hac an nerz da guerzet,  
Cals bugale languissant o deus sanctet e c'hraç,  
An oll a receo yec'het enni bian ha bras.

Ha bagou ha gobiry e deveus preservet,  
Ha tud cœuet er mor, pa zint dezi en em voestlet,  
O deveus bet recouret o buez disanjer  
Dre graç Santes Anna, guir vam-goz hor Salver.

Pobl eus a Douarnenez, me ho ped, ne vanquit quet  
Pa en em gueffot en danjer, troët pront ho speret,  
Oc'h Santes Anna ar Palud pedet a galon vad  
Da zonet d'ho preservi, guir Vam a Verc'hes sacr.

Quenient en emgav nec'het gant an affliction,  
En em voestlet er Palud gant guir devotion,  
Ha mea ell assuri gant guir fidelite  
E teuffet joaüs d'ar guær, en eur veuli Doue.

E pevar c'horn ar c'hartier approuvet gant an dud  
A c'hraçou qu'en necesser, a receivever er Palud,  
E Brest hac e Landerne, e Faou hac e Quemper,  
E santer ar garantez e vam-goz hor Salver.

Conquerne, Ene-Tudy, Penmarc'h ha Pont-Abat,  
E Pont Croas, e Goaiens e quever testou mat,  
En o afflictionnou o deus-y invoquet,  
An Itron Santes Anna o deus-y exaucet.

Bep meurs epad mis eost ez eus induljançou  
E Santes Anna ar Palud, pardon d'hor pec'hejou,  
A nep a rai a galon eur govesion vat,  
A recevo corf hor Salver gant eur feiz admirabl.

Nep en deus devotion da zont d'ar pardon bras,  
D'ar zul diveza a vis eost emâ ar sourcen a c'hraç ;  
An deiz-ze e deus choaset hor mam Santes-Anna  
Evit beza enoret gant oll dud ar vro-mâ.

O coves o communia da zevez ar pardon,  
E Santes-Anna ar Palud, gant gair devotion.  
Eus induljanç plenier gant ar Pab accordet  
D'an off gristenien fidel a zeu d'e darempret.

Me o suppli, christenien, dougust a galond vad  
Eur chapelet en enor da Vam ar Verch'és sacr :  
Deut de lavaret a galon bep meurs, vanquit quet,  
En enor Santes-Anna, e viot recompanset.

Deut muia ma vo possabl d'ar Palud d'e guelet  
Da visita he chapethe feunteunn biniguet, •  
Ha me assur, goulennet ar graçou a guerret,  
Gant eur galou preparet, certen a recefet.

O Itron Santes Anna, hor Mam hac hon Itron,,  
Hon recevet holl breman din dan ho protection  
Pedij hor Salver Jesus d'hor sicour nos ha de  
Hac en heur eus ar maro da receo hon ene.



Eun den yaouanq, a uguenvloas oajet,  
Pehini gaut ar vrec'h a gehs a guellet,  
A ras cals a nec'hamant hñd'he vam ha d'e dad,  
Guelet eur sort den yaouaq o coll e zaoulagad.

Ur personnach charitabl calias timat  
D'e vaestla er Palud da Vaa ar Verc'hes sacr ;  
Ractal ma o deus laquet oeren evitâ,  
E recevas ar guelet dre c'iraç Santes Anna.

En escopti a Leon e parrs Pleudaniel,  
E deus gret Santes Anna ve eur miracl caér  
En androet euf plac'h iauuanq a zo bet attaquet  
Memes e quijchen e dor gant eur c'hi arrajet.

Ar plac'h-man pa er goelas a gommanq da grial :  
O Santes Anna Palud ! hac a invoquas ractal,  
Dre bermisionna Doue, ar e'hi a lampas timat  
Gant errach gant eur mta, en abimas a voad.

Just eo q'hoas en hoc'h enor parlant eus ar graçou  
Oc'h eus obtenet d'ar bobl epad e klenvejou,  
Ann dud oll en ho tier, siouas ! var ar guele !  
Antier hospitaliou gant ar c'hlenvet louz-se.

A re o deus het bonheur d'en em recommandi  
Deoc'h es o affliction Mam ar Verc'hes Vari,  
A velen o tont bembdez d'ho chapel benniguet,  
O trugarecât Doue da veza bet ar iec'het.

Soudardet, martolodet ne aller quet nombri,  
An niyer a ve guelet bembdez var dro ho ti,  
O trugarecât Doue d'ho beza preservet  
En creis ann oll combajou, d'an danger ezposet.

Cals zo c'hoas a viraclou pere re hanvan quet  
E deus gret Santes Anna ar Palud benniguet,  
En andret tud afflijet demeus a pep cartier,  
Bet soulajet er Palud dre graç Mam hon Salver.

O Itron Santez Anna ! bezit avocadez  
Evit an oll pec'h'rien deu d'ho pedin bemdez,  
Vit ar pennou principalan zoous hon difen,  
Obtenet dezo ar c'hraç da soiten al lezen.

Recevet, mam beniguet, ni h̄i ped a galon vad,  
Dindan ho protection hon Tai santel ar Pab ;  
Ivez ar gardinalet hac an oll esquibien,  
Hac ann oll dud a illis da ḡes qui al lezen,

Sicouret, mam truezus, hon tud en armeou,  
Astennet ho torn eurus ha peuc'h ar c'hombajou,  
Chasset hon adversourien a bell deumeus hor bro,  
Ma vesimp fidel d'ho lezen tre betec ar maro.

Obtenet, me o suppli, o Mam carantezus !  
D'ar re zo en agoni eur maro eurus ;  
Obtenet digan Doue, d'ar groagues zo poaniet,  
Badiziant d'ar vugale, ha d'ar vam ar iec'het.

Hon tud hac hen oll madou a laqueomp oll gant joa  
Didan ho protection, Itron Santes-Anna,  
Pedit an Drindet santel da zont d'ho pardonni,  
Ma c'halimp dre ho siconr mon d'an Env d'he veuli,

